

Rolland Charles (tro-dro 1896)

Marcel Hamon Ar ganaouenn ETREBROADEL

Bet lakaet en doare-skriva a-vremañ. Skrid orin war Wikipedia.

Ar Han etrebroadel

War-zao ! tud daonet an Douar !
Kent mervel gand an naon, war-zao
Ar skiant a gomz hag a lavar
Rei an diweza taol-chao !
Ar Bed-koz a-bez d'an traoñ !
Mevelien baour , war-zao ! atao !
Groom 'vi mad dezi he haon (=hañv)
Bezom mestr 'leh beza esklaou ! (= sklav)

Diskan (bis)

Ar han diweza zo,
Oll, war-zao ha warhoaz,
Ne voo er bed med eur vro
Da vihan ha da vraz !

Entrezom 'n-eus salver ebed
Na pab, na roue, na den all !
Deom on-unan a vezo red
Ober amañ ar gwir ingal :
'Benn harz laeron vraz da noazoud,
Derhel ar spered en e blom !
Ha dao d'an houarn keit m'eo tomm !!

Ar Stad 'zo fall ! pep lezenn kamm
An deog a wad ar paour-kêz den ;
Deveriou d'ar re vraz 'n-eus tamm
Gwirioù ar paour 'zo eur gomz vên
A-walh dindan Vastr kastiza
Al Lealded 'houlenn traou all
Dindani 'vefom memez tra
Gand deveriou, droejou ingal !?

Hudur ! en-kreiz o prasoni,
Mistri war an oll labour
'Deus greet biskoaz med rañsoni
Laerez poan ar micherour ;
Rag en em bres an dud didalvez
Kement 'vez krouet 'vez teuzet ;

Goulennom 'vo rentet heb dale
D'ar bobl gêz ar pezh 'zo dleet ?

Micherourien ha kouerien.
Memprou a labour ar bed-mañ,
Ar bed 'zo d'al labourerien !
An dud didalvez diwarnañ !
Deuz o c'hwezenn int oll lard mad :
Na pa deufe eur sort brini
Eun deiz an douar da guitaad
An heol 'zalho da lugerni !

Garz ebed ken kreiz-tre peb Bro !
An oll dud breudeur war ar bed !
Ar brezelioù sod er blotou !
Dao d'ar re vraz c'hoaz mar bez red
Evite n'efom biken ken
A-vilierou da n'em zrailla !
War-zao ! ar skiant 'zo o ren
Deom 'vo red terri pe blega !?!

**Ar ganaouenn ETREBROADEL
Lakaet en brezoneg gand Marcel Hamon**

War-zao , tud daonet an douar
War-zao an dud paour o-deus naon
Ar skiant a hop hag a lavar
Skei ar bed 'n eun taol d'an traoñ

An traoù koz a hall moned pell
Mevélien gêz, war-zao, war-zao
Sklepom anez a-benn bouell
Skuiz om o veza esklaou

*Ar han diweza a zo
Oll a-raog, ha souden
Breudeur dre-oll a vo
E leh enebourien*

Nan 'n-eus ket a zalver braz
Na Doue, na mestr, na hini all
Produer, krog e-barz da benn-baz
'N em zav da-un gand ar re all
Da lak' al laeron da vond da goll
Da sklêrijenn ar spered

On hovel 'c'hwezmom 'ta dre-oll
War houarn tomm e vez skoet

Mahet a vem ar pezh zo permet
'N em wada rankom 'vid paea
Ar pinvidig 'n-eus dever ebed
Ar paour zo mad da vahata
'Dan ar vaz o plega on chouk
Deveriou ha droejou da bep den
Skuiz ez om o chom atao mouk

Sellit pebez pennou zo dioute
Rouez ar glaou, an hent houarn
Biskoaz 'n-eus greet ar baotred vraz-se
Nemed ober 'vel al louarn
E-barz ar prejou an Aotroune
Ema on labour hag on foan
Mankoud ra deom tapoud ane
Petramant chom atao dindan

Ar roue a veve ahanom ive
Peuh etrezom, tan d'ar re wask
'Blegom ket ken bremañ d'an arme
En teil, lakom fuzul ha kask
Med, ma 'deus c'hoant an dreberien dud
D'ober deom evel al loueou
Ar fuzul ne chomo ket mud
Hag evite 'vo an tennou

Ouvrier, peizant, nim a vez
Ar bobl vraz euz ar re 'deus poan
An douar n'hell ket beza dezo
N'eus ket ar blas d'ar feneant
Ped 'zo o veva deuz on gwad
Med ar brini a zo war-dro
'N o foñs pa 'devo bet on zroad
Neuze an heol a lugerno !